

Maria Prat : Soazig Lostarharr

Diviz etre Gwion hag Anna

Anna

(*O tond en ti*). Sell aze, n'eo ket arru ma faotr koz er gêr c'hoaz! Ha peleh eo sac'het hennez da lostenni adarre? N'eus forz, red eo din kerhed patatez da beilled, rag arru eo ar houlz da brepari koan. (*Mond a ra er-mêz*).

Gwion

(*O tond*). 'M-eus aon n'eus den er gêr. Well a ze 'n eur feson, rag me zo karget d'ober eur gomision divalo amañ, ha ma vez Anna aze, ne gredin ket lared. Nann, êzetoh eo lared evid ober. Ya, galloud a rin klask tro evid arruoud da lared da Anna eo lahet he faour-kêz pried war an hent.

Anna

(*O tond*). Sell 'ta, Gwion! Te zo war ar bale?

Gwion

Hañ, ya, penaoz?... Heu!... N'on ket 'n em dromplet. Amañ emañ ti intañvez Soazig Lostarharr?

Anna

(*O peilled patatez*). Ma feiz, geo avad 'n em dromplet oh deuz an hanter. Amañ emañ ti Soazig, med n'on ket intañvez.

Gwion

A! iskuzet ahanon, med penaoz, gwir eo oh bet dimezet da Soazig?

Anna

'H on bet dimezet? Ha 'h on bepred; ya, n'on ket divorset.

Gwion

Nann, nann, Soazig oa ket eur paotr da divorsi 'vel-se. Ganin-me oa chomet kamarad, feiz 'vad. Heu... beteg hirie ive, ze zo kaoz on deut beteg amañ da... da... heu... heu...

Anna

Ma feiz, plijadur 'nevo greet din kaoud ho vizit.

Gwion

Hañ, ma vizit 'nevo greet plijadur deoh? Neuze c'hoaz da vihannañ chomo ket zammet ma hoñsiañs. Me vez kontant pa 'mez greet plijadur. Doan am-mez da hloazañ an dud.

Anna

Me vez ive, 'vid se emañ an den war an douar, 'vid rentañ servij hag ober plijadur.

Gwion

'Hanta, ya, deut on justamant amañ 'vid rentañ servij deoh, heu... heu..., 'vel a gomprenet.

Anna

'Gomprenan ket justamant petra 'peus c'hoant da lared. Koulskoude me gompren buan pa vez kemeret amzer da eksplikañ din.

Gwion

Heu... heu... da lared eo ma homision n'eo ket êzet da eksplikañ.

Anna

Marteze eo eun dra bennag hag a depant deuz Soazig? Ha just n'eo ket arru er gêr. Med da heul ze marteze e-pije evet eur chopinad da drinkañ d'e yehed?

Gwion

Da... da... heu... heu... da drinkañ da yehed Soazig? Eun tamm eo diwevad.

Anna

Diwevad? N'eo ket nemed seiz eur, ha neuze, laret vez e galleg "jamais trop tard pour bien faire".

Gwion

Prist! n'onn ket hag-eñ e vefe ze "bien faire" evid Soazig? Med da vihannañ, c'hwi oar lakaad ar poent war an i!

Anna

Ma feiz, ze zo gwir ive, arru on krog da gaoud hir ho kaoz ha ne gomprenan na penn na lost. Eun dra bennag 'peus da lared din diwar-benn Soazig?

Gwion

Heu... da lared eo, oa ket didach e votou pa oa eet deuz ar gêr?

Anna

Didach e votou? Bremañ vez ket tacht ar botoiou ken.

Gwion

Justamant, ze zo kaoz d'an dud da rampañ a-wechou... Hirie beure oa

eun tamm "verglas" , reo gwenn. A-benn noz e oa ramp an hent.

Anna

Ha petra? e vefe bet rampet ar paillas kêz-se?

Gwion

Da lared eo e droad a-dreñv a zo rampet da gentañ hag ar reou all goude da heul ha 'vel-se eo bet kouezet.

Anna

Ha ne oa den ebed eno da zevel anezañ 'n e za?

Gwion

Geo, med, heu... ne chome ket 'n e za, justamant.

Anna

Med, tonner! bezañ lakeet anezañ 'n e goazez neuze!

Gwion

'N e goazez? Heu... ne chome welloh ive. 'Benn neuze oa tremenet eur hamion ha hemañ 'nevoa rojou.

Anna

Toud ar hamionou o-devez rojou, anez vefent heñvel ouz eun tank pe eun treno. Ha goude?

Gwion

Feiz sur, eur hamion n'eo ket eun dra dañjeruz, med ar rojou oa pounner ha Soazig glee ket bezañ eun den gwall-galed, setu...

Anna

Setu petra? Tremenet ar rojou dreizañ ha pladet anezañ?

Gwion

Ya, med ar medesin pa'h eo arru 'n-eus laret 'nevoa ket ezomm na supozitoariou na kachedou. 'N-eus kaset anezañ d'an ospital, med eno vo ket miret.

Anna

'Vo ket miret? Abalamour da betra? Daoust hag-eñ n'eo ket en ospital emañ plas an dud vleset?

Gwion

Ya, keid ma vent beo, med paz goude.

Anna

Med penaoz? C'hoant 'teus da lared din n'eo ket beo, med neuze eo maro 'ta?

Gwion

Hañ hañ! Pa'h eo c'hwi ho-peus laret e oa maro, n'eo ket me eo a-nevo kaset ar helou. Setu greet ma homision 'benn ar fin. Ken arhoaz, Anna. (*Mond a ra er-mêz*).

Anna

Hañ, sell amañ eur helou avad a-greiz-toud! Med neuze n'arruo ket Soazig d'e goan amañ! Er gont-se em-eus peillet tra-walh a batatez din manan. Ar pezh 'm-eus d'ober neuze eo lakaad aneze war an tan, rag arru eo ar houlz. Ha keid ma vefont o poahed em-mo amzer da zoñjal penaoz a rin bremañ pa'h on intañvez.